



AR BARZIK

Kinniget da vugale Skol kristen Zant-Nikolas.

Lento.

Me eo ma ha no ar bar-zik, Me
 eo ma ha-no ar bar-zik ; Skanv
 e ga-lon, drant e voue-zik ; Skanv
 e ga---lon, drant e voue-zik.

Me eo ma hano ar barzik,
Skanv e galon, drant e vouezik.

'Vel an estik me 'oar kanan ;
Mez nan oun ket goue eveltan.

Me gân da nep 'gar ma c'hlevet ;
Pa ven ma-un, me gân bepred.

Me gân evit ar prajou glaz,
'Vit ar bokedou, 'vit ar waz.

Me gân eus a greiz ma c'halon,
'Vit ar gwe braz 'barz ar c'hoat don ;

'Vit ma breudeur, al lapoused ;
Ar re-ze 'zo ma mignoned.

Me gân 'vit hekleo ar mene,
A respont d'in gant karante.

Me gân evit kement a vev
War an douar ha 'lein an nev.

Dreist-holl e kanan d'ar C'hrouer,
A roaz e vouez d'ar c'haner.

Holl e selaouont ar barzik,
Glân e galon, drant e vouezik.

Selaouet ive gant dousder,
Na pa vije ma zôn dister.

Ar barzik, ma plij gant Doue,
Ar *barzik* a vo *barz* eun de.

An de-ze, tud vad, c'houi 'glevo
Eur zôn kaeroc'h war e c'heno.

Eur zôn gaer ha meurbed laouen
A gano d'ac'h war an delen.

Telen Marzin. telen Gwiklan,
Telen Arvor, hounnez a gân !

Hounnez a oar gwerziou dispar,
Seurt ne glever ken en douar.

War hounnez e ve kanet Breiz,
Meulodi ar Vro hag ar Feiz.

Hounnez a ra da bep Breton
Birvi ar gwad en e galon.

En eun huvre me 'm euz gwelet
An delen goz, hi alaouret.

Eun otro kaer, gwisket en gwen,
A ginnige d'in an delen.

Hag e lare 'vel eur muzik :
Setu aman da lod, barzik !

Hastet eta pedi Doue
Ma vo 'r barzik barz hep dale.